

IIIvet milved kent J-K: ar c'hevredigezhioù kentañ
 Goude ganedigezh ar skritur hag al labour-douar e ta ar c'hentañ **keodedoù-Stad**(Our,Ourouk...) er **C'hresk strujus**(Mezopotamia,Ejipt)


Vvet kantved kent J-K:
 Aten en he barr: ar strategour **Perikles** a roas urzh da adsevel an temploù àr an **Akropol** hag e voe adsavet **Parthenon** : un templ (un neved) en inor d'an Doueez **Atena**.

56 kent J-K: Trec'h eo ar Wenediz
 trec'h ar Romaned àr ar **Wenediz**: dont a ra an Arvorig da vout edan aotrouniezh Roma.
52 kent J-K: Emgann Alezia, Verkingetoriks ha Kezar
 Trec'h eo **Julius Kezar** àr **Verkingetoriks**, un nobl galian, en **Alezia** : roman e ta Galia da vout.Deroù ar **romanekadur**.

IV-VII kantved: enbroadeg ar Vretoned en Arvorig:
 A-gaoz da gwaskerezh an Angled hag ar Saozon e tec'h kuit lod ag ar **Vretoned** ag o inizi àr-zu an douar bras.

800:kurunadur Karl Veur
 Sakret eo **Karl Veur**, **impalaer ar C'hornôg**, roue ar Franked. Get ar Pab e oa bet roet dezhoñ ar gurunenn a impalaer. E Aac'hen (Aix-la-chapelle) emañ e annez.

845: trec'h Nevenoe àr ar Franked e Ballon: dont a ra **Breizh da vout unvan ha dizalc'h**. Nebeut àr-lerc'h e ta Roazhon ha Naoned da vout stag doc'h Breizh.



VIIIvet kent J-K: Homeros, savidigezh Roma, deroù skritur ar Bibl

Homeros, ur barzh dall a skriv e **800 kent J-K** *Ilias* (a gont brezel Troia ha nerzh-kalon ar brezeler Akiles) hag *Odisseia* (a gont fin brezel Troia ha distro padus Ulises d'Itaka, e rouantelezh).Diazez ar sevenadur gresian eo ar barzhonegoù-mañ.

Hervez ar vojenn e vehe bet savet kêr Roma tro-dro **753 kent J-K** get **Romulus**.

VIII kent J-K: Er memes kourz e krog **an Hebreed** da skriviñ **ar Bibl**. Orin ar relijionoù pennañ undoueek eo ar Bibl(yuzeviezh, kristeniezh, islam)

An Iañ ha IIvet kantved goude J-K :ar peoc'h roman
 An impalaeriezh roman en he barr : ur c'hantved a beoc'h a zo er broioù edan beli Roma tro-dro Mor Kreizdouarel. **Ar peoc'h roman** e vez anvet an dra-se. Kreskiñ a ra ar c'hêrioù roman.

Kantved kentañ : Deroù ar gristeniezh
 Diàr ar yuzeviezh, **ar gristeniezh** a zo ganet en impalaeriezh roman. Heuliet a ra ar gristenien kelennadurezh **Jezus Krist marv àr-dro 30** ha diazezet eo àr **an Avieloù**. blezad unan : ganedigezh Jezus e Galilea.

Spisverkoù ar 6vet evit ar Breded

